




# QUÉMÉIAD

AN

# E Z A C' H



Er blaves dec ha triuguent goude an triouac'heant,  
Blaves a drubuillo, malheur ha nec'hamant ;  
Dré ar séc'hour, da guenta, Doué neus dimp discoèet  
Ma tlezemp chang é vuè ha couitat er pec'het.

Nin né remp nep séblant dimeus é c'hourdouso :  
Pep unan é c'heüllé bépret é penchencho,  
Gourc'hemeno Doué né vijent quet heüllét,  
Surtout ré an Ilis ne oanquet chilaouet.

Da vèner, da sadorn quic é vijé débret,  
Ar sùl, ar gouéliou bers oanquet sanctifiet ;  
An ourgouil é voa réglen péhini a rèné,  
Pel so nifoa den sonch deus an humilité.

Hon C'hrouer, ben er fin, deit a c'hé da scuisan,  
Ha dré eur brézel-sanglant deuet d'hon c'horrigan ;  
Louis-Napoléon, empereur deus a Franç,  
Voa eur franc-maçon bras casi hep conscians.

Diclério ré brézel, euv hac e vinistret,  
Hep na tud, nac armo, na netra bréparet ;  
Deustu oa gret appel d'ar gard mobil yaouanc  
Da zont diudan an drapeaux immédiatement.

— 5 —

Cals ané nifoa laquait lod dimeus ho mado  
Da pèan conscrivet da vont é no phlaço,  
Nobstant da guément-sé lancet é an décret,  
Neus quet da vare'hata, partio vézo red.

Neusé é c'helvjont hoas da zonnet dan armé  
Ar gos vilitairien hac achu o c'hongé,  
Pa c'houler governamant né oa man da répliquo :  
Béta pemp bla ha trégont rencjont tout partio.

Ah ! bebez traytourach goudé bout o galvet,  
O chassézeün d'ar pecho péré nifoa stennet ;  
E bars er guer a Sédan ouspen pernguent mil den  
A livré d'ar Prussiannet evel prisonniérien.

Oh ! trahison miliguet pini da virviquen  
Goude ma viet maro a boëso voar o pen ;  
Potret ar gampr pa glevjont voa gret an drahison,  
Ha goërset armé Sédan gant an Napeléon,

Broclames ar républiq ar pevar vis guengolo,  
Ha biquen raç Bonapari na c'houverngé hon bro ;  
Vit répari an domach nifoa gret don armé  
Voa red guervel tud al da bartio aré.

Ar célibatairien don beto daou ugent via  
Gret é voa dè appel ivé da bartia ;  
Goudé trahison Sédan, Franç nivoa ar gréden,  
Né oe quen en armé a cheffou treitourien.

En em tromplet e bet : béan oa c'hoas mæstro  
Hac e nifoa desseing da zont da drahiso.  
Bars er guer deus a Vetz ar maréchal Bazaine  
Nifoa dindan é zroad cant hanter cant mil den.

Goersset int bet d'ar Prusse da gargan é brisonio,  
Da zibri gant anstur ha dor cofou goulo ;  
An oll a grédé dè é oa quer imprénabl  
Gant eun armé quen ponner hag eur chef quen capabl

Ar Prusset oc'hanan anzav ouienq ersad  
Bazaine gant é armé oa capabl do fellad.  
Abandonni ar siège, hasto gonet ho bro,  
Pe autramant périssant dindan ar bouléjo.

Elec'h ober sortio, vel ma glégé ober,  
Bazaine gant é armé chomel ré en quer,  
Quen e éoa epuiset tout provision,  
Vit cavet tu, dré ennon, da coach é drahison.

Metz hac é goarnison tout é hint bet goerset  
Ha lest ar passaj libr gant on ennemié  
Vit donnet da guémer cant hanter cant mil den,  
Da gresqui c'hoas an nombr deus ho frisonierien.

Consternet é voa n'oll pa glevjont ar c'hèlo,  
Ma redenq oll, gant prés, da len an dépécho ;  
Goudé bézan lennet laré n'eil d'éguilé  
Oa laquait un traïtour en chef voar an armé

Hag e nifoa commetet eur c'hrim impunissabl,  
He hano bars an histoar da viquen responsabl,  
Mar boa bras an drahison en Sédan comméte,  
Né oa netra da c'homman mar veng comparajet.

Goerzet alc'hoé ar Franc pene Metz trahiset (1)  
Hag eur victoar ar c'haëran vit on ennemié.  
En cas mé venq chaséet deus an dro da Paris  
Libr é ar passaj dè da retourn voar o c'his.

Chetu génet ar mempro deus ar gouvernamant  
Hac an oll Francisien en généralamant  
Clasq gout dré pez moyen cavet hoas soudardet  
Da ober résistans euz an ennemié.

Péré dré ma c'havancenq a riviné hon bro,  
Pillal ar paysantet hà tanno ar c'hèrio,  
Ha violé ar groagné ha goudé ho laso,  
Bugalé ha tud cos a souffré ar maro.

Dré zeouarn an tirantet scoleit gant Lucifer,  
Péré deu da spontan an Europ en entier,  
E laca o slijadur da scuil goad innoçant  
Ha da heuil ar plan dresset dé gant an aërouant.

Ouspén, men neus lennet é voar ar c'héloïo,  
Me cavenq bugalé vian bars en no c'haveillo,  
Ma treantenq enné gant o baïonnettes,  
Crimou é ra horreur d'ar sauvaget mêmes.

Oh! bouchérien infam, lazo eun innoçant  
Pini né mep feçoa caus d'ar brézel présent.  
Red vo ober moyen da sevel arméo  
Da gaç an tirantet émes démeus hon bro.

(1) Pa gomzan deus a drahison Sédan ha hini Metz é lézan ar  
responsabilité gant an nep e neus hé publiet da guentan.

**Mempro ar governamant o deus considéret,  
Oa pelloc'h impossubl espern an dud dimed,  
An eil dé a vis du o deus décrétet,  
Tout béta daou uguent vlas vigent mobiliset.**

**Décret trist ha glac'harus, mar boa biscoas hini,  
Pa reng an tad a famill sortial deus hé dy,  
Quouitad hé tiégues ha monet dan armé,  
Lésel en abandon pried ha bugalé.**

**Chétu groagué Kérien bréman bars en canvo.  
O vélet o ézac'h o rencout partio,  
A greis ma displijadur chagrin ha trubuillo,  
Mé dastum mé oll gourach vit ésat disclério.**

**Eur c'héméiat an tristan péhini a néfo,  
Léc'h en parous Kerien ben eun neubeut déio,  
Mes antrepren ran muy vit a so nem galloud,  
Men so bas a spéret hac incapabl a tout.**

**Mes quen mont deus ma bro carfen rei da intent,  
Ar galonad é meus o quitat ma c'hérent,  
Lancet é an décret gant ar governamant,  
Réd o din partio na né ven quet contant.**

**Mes chétu men mantret beuet gant an daëro,  
O rencout dilézel ma famill ha mé bro,  
Oh! Itron Varia é gonsolation,  
Ébars er momet man sicouret éc'hanon.**

**Deus tu oan inspiret da vont da govésad,  
Da laquad ma iné paour gand Doué en stad vad,  
Mont é ran gant an hent entrésa bourg Kérien,  
Nem sonjal em bué oc'hober m'examen.**

**Ari on en ilis eus ar govision,  
Léc'h ma meus obténet alies ar pardon,  
Demeus ma péc'héjou en amzer dréménet,  
Mésericord Doué neus é tout ancouaet.**

**Mes hoas é c'hinvoquant assistanç en envo,  
Rédoubli a ferveur crésqui ma fédénno,  
Vit goul er c'hraç dober eur govision vad,  
Dont eun den a vérit elec'h bezan coupabl.**

**Martézé évéach man é ma goéch divizan,  
Da zonet da goves ébars an ilis man,  
Ar govision éc'halfé martézé,  
Dépandi deus ma sort pad an éternité.**

Breman meus récévet an absolven général,  
Goelc'het ma c'honscians ha prest dont dar bed al,  
Eur c'hlizen a zouster a zisquen em c'halon,  
Nem scuil daëro a gueun hac e gontrition.

Mé ho trugaréca madéles eun Doué,  
Bréman vel eur merzer mé a yélo d'an armée  
Otrou sant Per biniquet patron ar barous man,  
Prosternet on dirazoc'h vit ar vech divisan.

Pa rencan scuil ma goad evid difen ma bro,  
Maro on gant glac'har nem laret dac'h quenno,  
Pedet hoas évidon mar plijo gant Doué,  
Pa couien voar an dachen récévout ma iné.

Né allan hars pelloc'h eus eur mor a zaëro,  
Dac'h c'honi ilis santel men lavar quennévo,  
Dé draou gant en ilis bob da mé c'havancen,  
Gant daëro mé div lagat er pavé a c'hlében.

Ari ébars véred mén a neus rémerquet,  
Er plaç lec'h répos cals deus ma mignonet,  
Na mén gléfoa ivé goudé fin ma bué,  
Ma c'horf dont da répos er memes plaç ganté.

Mes Providanç Doué a zispos a hent all,  
Ma vézin interret ébars é neur plaç all,  
Mes né neus fors pelloc'h hei ma c'horf da vreino,  
Dé re varn général men a rescusito.

Évit beza barnet gant ma Zalver Jésus,  
Graç dimp oll da vézan deus aré évurus,  
Ari voar ma vév ma zud men né meit goëlo,  
Plaç an dour biniquet men cargué a zaëro.

Non quet évit pidi vit répos o iné,  
Mes espéranç é meus mé pligo gant Doné,  
Mar guint hoas gléourien de vadéles Divin,  
Me c'haccordo dézé eur joaüstret hep fin.

Martézé voar ma bev ne aivo biquen den,  
Da laret évidon an distéran peden,  
Mes en parous Kérien a so inéo mad,  
A sicouro n'anaon é neur féçon bénac.

Pa glévo ma bugalé pénos é vin maro,  
Sambles gant ho mam baour i laei oferno,  
Évit an délivranç ædus a iné o zad,  
Pidi rainq hac ober eun alusen bénac.

Aï voar blacen er bourg ma fen ganin plèguet,  
Evit parlant ouzin men né responten quet,  
Adieu ta Kériennis quenno dae'h é laran,  
Men a quemeiad ouzac'h vit ar vech divizan.

Bézet sonch ac hanon bars é no pédeano,  
Me renti eun iné mad da Groner en envo,  
Donet é ran dar ger ha me c'halon fraillet,  
Nen sonjal an daëro a scuillé ma fried.

Pe n'aruis ar guer oa me zy en canvo,  
Né vijé quet gouassoc'h na pe vijen maro,  
Div lagat ma friet gant an daërou beuet,  
He c'halon gant glac'har éoa casi rarnet,

Ah! pebes calonad é mei ma bugalé,  
Ho tad a renq breman partio dan armé,  
Nep é oa hon souten ébars en pep feçon,  
Breman hervé velan omp lest en anbanden.

Nem consolet ma fried ha c'houi ma bugalé,  
Lacait ho confiañç en providañç Doué,  
Biscoas den ne neus lest en abandon,  
Mar nem recommandenq dézan a vir galon.

Da volonté Doué nem résinamp bopret,  
Ra vézo é hano da virviquen meulet,  
Da volonté Doué men a so résinet,  
Mes dont é ra sonch din deus ma c'hontrat eured.

Nin moamp sinet hon daou ennan voar ar paper,  
En présenç au testø ar maest scol bac er mair,  
Biquen séparation en trézomp né vijé,  
Quen arujé er maro gant an eil pé éguilé.

A rest deus ma bué men a rei o canvo,  
Hac é bedou vidoc'h bété fin ma deio,  
Men gargé da vianan ma plic'hgé gant Doué,  
Ebars er momet man, lacat fin d'am bué.

Doué neus a dra sur voarnoc'h é desseigno,  
Oc'h lacai évurus adaré pé garo,  
Birviquen évurus ne vent voar er bed man,  
Deus a greis ma c'halon ar marv a zésiran.

Ma sentfec'h eus m'avis né gomsfec'h quet a sé,  
Goul é refec'h quentoc'h en iet gant Doué,  
Pa po ré a chagrin deut da gonsidéri  
Sort tristoc'h évudoc'h vit en em gonsoli.



Meur a hini zo lest gant tiadou bugalé,  
Hep sicour a hent all meit providañ Doué ;  
Divoar boës oc'h mado c'hui bepret a vevo  
Hac o pugalé baour entrétant é savo.

Men vel ez ou forset da ober ma c'héméiat,  
Bréman gléjen bézan ari en Boulb'iac.  
Arça, ma merc'h vian, quenno dac'h é laran,  
Men ya doc'h embrassy vit er vec'h divizan.

Beyet fidel doc'h mamm queit a vo ni bué,  
Graç dimp dé nem vélet en barados Doué.  
Rannet é ma c'halon, émézi, ma zad quer,  
O'velet é renquet partiô deus ar yer.

N'allan quet résisto ous bolonté Doué,  
Mes pidi rin vidoc'h béta fin ma bué.  
Dac'h, c'hui, me map bian, é ran ma eil quéméiad,  
Nem dolet hoas eur vec'h entre divrec'h o tad.

Bezetsonch deus hoc'h mam : dac'h ec'h récommandan,  
Gant carante eun tad, quenno dac'h é laran.  
Oh ! ma zad, émézan, bété fin ma deïo,  
Quen hir a ma bué é padou ho canvo.

Neus meit Doué hep quen a guément a vé capabl  
Da vusuilli er glac'har é meus eus o quouñfad.  
Dac'h ivé, Mari-Job, men lavar quennévo,  
Pa né guir omp foret da nem zispartiô.

Chomet da essistan ma groeg ha mé bugalé,  
Gret dé o péou en doubl quantoc'h vit mont ganté.  
Bet persuadet mad, émézi, Jean-Mari.  
Ne c'houléuanquet gouel évit chom en ho ty.

Queit a c'houlonq ec'hanon chomet é rin ganté,  
Men-mou sonch ec'hanoc'h a rest deus ma bué.  
Eus ma fried é meus c'hoas da guéméiadi,  
Evel eur Vadalen mé guel o déplori.

Ari é, ma fried, an termen divésan,  
Né allan hars pelloc'h, quenno dac'h é laran.  
Doué d'ho sicouro aman voar an douar,  
Graç dimp da nem vélet eun devez bars er gloar.

Coël é remp hon daou d'an douar fatiguet,  
Né allemp quet sevel hep bézan sicouret ;  
Doué a vadélès deuet don c'honforti  
Pé a varvfemp hon daou ous en em sépari.

Pa deuas dam fried ar galloud nécessaire  
Quéméadi res ouzin vel me c'hallé ober,  
Cri a vijè er galon ha cri ma né ouelgè  
Bars en Guernémanac'h eun dé nep a vijè

O velet an daëro dimeus ar femèlen  
O laret dé fried : quennévo an traouien,  
En traouien Josaphat aré nin nem vélo  
Ha graç dimp da pignal assemblies en envo.

Bugalé, tad ha mam oll e voamp en canvo,  
Da traou gant leur an ty a redè au daëro ;  
Forcet on do c'houitad, gant ar marv em c'halon,  
En em rei dézè tout ma bénédiction.

Achui ran me zon é neur vont deus ma zy,  
Excuset é c'hanon mar so faut en euni,  
Beuet on a chagrin, sammet a trubuillo,  
Né ma quet ma spéret en état da rimo.

Mes pa po é c'hlèvet, mar plich dac'h éguisé,  
Lavaret eur béden vit répos ma iné,  
Nep é neus gret er zon é réquè partio,  
E nem récommandi é ra do pédenno.

Ober é ra parti dimeus an eil banden,  
He hano Jean-Marie Nent, deus a barous Kerien ;  
Dizrei é rai d'ar yer, goudé i boan, i fatiq,  
Gant lôret ar victoar, *vive la république !*



(PROPRIÉTÉ.)